


L. I. C. & M. I.

BREIZIS, D'AN ARGAD !




# Evit Doue, hor Bro, hon Iez !




Air national gallois : *Ymdaith Gwyr Harlech.*


MODERATO



San - tez An - na, hor Pa - tro - nez, Euz barr an Nenv




gant tru - ga - rez Gwe - lit Brei - zis holl a - sam - blez



di rag ho skeu - den !... Hor feiz koz a zo hes - ki - net,



Hor bro ger - i - vez gwal - ga - set, Hag hon iez a



zo dis - pri - jet : Oh ! deuit d'hon di - fen !...

## DISKAN



Pe - dit, San - tez AN - na, Hon Dou - e d'hon  
 har - pa. 'Vit der - c'hel ban - ner ar Feiz sounn  
 a - to e'r vro gaer - ma !... Ha d'an ar - gad,  
 holl a - u - nan ! Beac'h da holl ve - vel - lien Sa - tan !  
 Be - vet Dou - e ! Ker - zomp bu - han : 'Vit JEsus hag hor Breiz !

## I

Santez ANNA, hor Patronez,  
 Euz barr an Nenv, gant trugarez  
 Gwelit Breizis, holl asamblez  
 Dirag ho skeuden !...  
 Hor Feiz koz a zo heskinet, —  
 Hor Bro ger ivez gwall-gaset, —  
 Hag hon iez a zo disprizet :  
 Oh ! deuit d'hon difen !...

## DISKAN

Pedit, santez ANNA,  
 Hon DOUE d'hon harpa,  
 'Vit derc'hel Banner ar Feiz  
 Sounn ato er vro gaer - ma !...  
 Ha d'an argad, holl a-unan ! —  
 Beac'h da holl vevelien Satan !  
 Bevet DOUE ! Kerzomp buhan :  
 'Vit JESUS hag hor Breiz !...

## II

Hon Tadou koz 'zo bet fidel,  
 E-kreiz ar peoc'h hag ar vrezel,  
 D'ho Iez ker ha d'ho Feiz Santel : —  
     Ni 'rai evel d'ho !...  
 Ni 'n deuz ivez pennou kalet, —  
 Doue 'jom din da vea karet, —  
 Hor Brezoneg 'jom kaer meurbed :  
     'Vit'he ni ' varvo !...

## DISKAN

Pedit, santez ANNA,  
 Hon DOUE d'hon harpa,  
 'Vit derc'hel Banner ar Feiz  
 Sounn ato er vro gaer-ma !...  
 Ha d'an argad, holl a-unan ! —  
 Beac'h da holl vevellien Satan !  
 Bevet DOUE ! Kerzomp buhan :  
     'Vit JESUS hag hor Breiz !

## III

Mam-goz JESUS, hor gwir Zalver, —  
 Mam ar Werc'hez, hor Mam dener, —  
 Pedit DOUE. — trist é 'n amzer ! —  
     Da rei d'homp ar peoc'h !...  
 Grit na vezo morse kavet  
 En hon touëz trubard ebed, —  
 Mez ra jomimp fidel bepred  
     Da ZOUE ha d'Heoc'h !...

## DISKAN

Pedit, santez ANNA,  
 Hon DOUE d'hon harpa,  
 'Vit derc'hel Banner ar Feiz  
 Sounn ato er vro gaer-ma !...  
 Ha d'an argad, holl a-unan ! —  
 Beac'h da holl vevellien Satan ! —  
 Bevet DOUE ! Kerzomp buhan :  
     'Vit JESUS hag hor Breiz !...

## Pedennig ver d'an Intron Santez Anna,

Patronez Breiz-Isel

Santez ANNA, hor Mam, hor Mam muia-karet.  
 V r vrezel a zo tenn, — hon enebour ' zo krenv :  
 Na pegoulz e teuio JESUS da gemeret  
 H ruez ouz hor Bro Frans, gwech-all 'n tosta d'an Nenv?...  
 E Breiz, ni a fell d'homp chom fidel d'ar Feiz koz,  
 No bet hag a vezo gwir hent ar Baradoz !...  
 V l lean d'an harlu, — ar beleg d'ar prizon :  
 Na DOUE, nag Ilis : — setu stad ar vro-ma ! —  
 Na pegoulz 'vo roët frankiz d'hon Relijion :  
 V r peoc'h a c'houlennomp : — Truëz, santez ANNA !

EVEL-SE BEZET GREAT.

IMPRIMATUR :

*Corisopiti, die 25a Octobris, A. D. 1910.*

A. COGNEAU,  
Vic. Gén.

En vente chez le R. P. TRÉBAOL, O. M. I., Llanrwst, Wales (Angleterre) et à l'imprimerie du *Courrier du Finistère*, 4, rue du Château, à Brest (Finistère) : — 10 exemplaires (avec l'air en musique), 0 fr. 75 ; — 25 ex., 1 fr. 30 ; — 50 ex., 2 fr. 30.